

Gellig bras

Mary Vaughan Jones

An Here, 1986

Gellig bras – lankad 1 : pajennoù 1-3

1. Gerioù nevez

davet : war-zu.

hogen : met.

kerkent ha ma... e ... : diouzhtu war-lerc'h ; raktal war-lerc'h...

skudell : lestr kleuz da lakaat boued, evel ur plad kleuz, ur volenn,
ur saladennouer.

tarch : takadig disheñvel e liv diouzh al liv zo tro-dro dezhañ.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez ar memes tra ha :

fichal e lost :

dont en-dro :

bepred :

tremen an teod war :

ur plad :

3. Argenañ an araogennoù

Da lipat DEZHAÑ e zorn = Da lipat e zorn DA Yann.

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

..... = Da lipat he dorn da *Chanig*.

..... = Da lipat ma dorn.

..... = Da lipat da zorn.

4. Studi ar yezh : kerkent ha ma... e ...

Da gentañ e wele Gellig Yann, ha diouzhtu war-lerc'h e fistoule e lost.

Kerkent ha ma wele Yann e fistoule e lost.

Tro ar frazennoù amañ da heul gant « **Kerkent ha ma... e ...** » :

1. Da gentañ e teu ur soñj din, ha diouzhtu war-lerc'h, en skrivan em c'haier.

Kerkent ha ma e

2. Da gentañ e welan tud, ha diouzhtu war-lerc'h en o saludan.

.....

3. Da gentañ e vez kaer an amzer, ha diouzhtu war-lerc'h ez a an dud d'an aod.

.....

4. Da gentañ e sav an heol, ha diouzhtu war-lerc'h e richan an evned.

.....

5. Da gentañ e klevomp ar c'hloc'h, ha diouzhtu war-lerc'h e redomp d'ar c'hlas.

.....

6. Ijin ha skriv bremañ da frazenn :

.....

5. Distag ar gerioù-mañ :

Kerkenthamaweleyannefistouleelosthagerededavetañdalipatdezhañezorn.

.....

.....

6. Barrenn ar frazennoù gaou :

1. Gell ha gwenn eo Yann.
2. Eürus eo Gellig.
3. Skrivet eo anv Gellig war e skubell.
4. Er maez e kousk Yann.
5. Mont a ra Yann d'ar skol.

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Pet takad gell zo war gorf Gellig ?

.....

2. Displeg perak e red Gellig davet Yann pa wel anezhañ.

.....

3. Ha bihan eo c'hoazh Gellig ?

.....

4. Penaos eo gwele Gellig ?

.....


5. Perak n'emañ ket an traoù evel gwechall ? Petra zo kemmet ?

.....

8. Tres :



ur skudell



ur skubell

Gellig bras – lankad 2 : pajennoù 4-5

1. Gerioù nevez

o deveze : o doa.

keuneudenn : tamm koad.

Ur vodenn : ur strollad plant

eno : du-hont.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez ar memes tra ha :

pakañ :

anv ur c'hoari ma rank unan klask ar re all :

o daou asambles :

diouzhtu pa :

lec'h da azezañ :

3. Argenañ an araogennoù (kendalc'h)

Pa oa ur c'hi bihan anezhañ. = Pa oa-**eñ** ur c'hi bihan.

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

Pa oa ur bugel bihan _____ = Pa oan-**me** ur bugel bihan.

Pa oa ur bugel bihan _____ = Pa oas-**te** ur bugel bihan.

Pa oa ur bugel bihan _____ = Pa oa-**hi** ur bugel bihan.

4. Studi ar yezh : kerkent ha ma... e ...

Kerkent ha ma tigre tad Yann dor ar c'harr e lamme war an azezenn a-dreñv.

Tro ar frazennoù amañ da heul gant « Kerkent ha ma... e ... » :

1. Da gentañ e ra glav, ha diouzhtu war-lerc'h, e tigor Yann e zisglavier.

Kerkent ha mae

2. Da gentañ e son e fleüt, ha diouzhtu war-lerc'h e teu ar razhed war e lerc'h.

3. Da gentañ e klev trouz, ha diouzhtu war-lerc'h e harzh.

4. Da gentañ e wel ac'hanon, ha diouzhtu war-lerc'h e teu da 'm saludiñ.

5. Ijin ha skriv bremañ da frazenn :

5. Distag ar gerioù-mañ :

Plijadurodeveze Yannha Gelligoc'hoarianeilgantegile.

6. Barrenn ar frazennoù gaou :

1. A-wechoù e vanne Yann ur geuneudenn.

2. A-wechoù e taole Yann ur c'hreunadenn.

3. A-wechoù e c'hoarie Yann ha Gellig troadig-kamm o-daou.

4. Aon en deus Gellig rak ar c'hirri.

5. Pa zigore an tad dor ar c'harr e kouezhe Gellig war-dreñv.

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Peseurt c'hoarioù a vez gant Yann ha Gellig ?


2. Ro anv tri lec'h ma c'hall Yann kuzhat.

3. Penaos e oar Gellig emañ o vont da bourmen gant ar c'harr ?

4. Perak e red Gellig a bep tu pa gompren e vo lakaet er c'harr ?

5. Sell ouzh ar skeudenn. Pet dor zo d'ar c'harr ?

8. Tres Gellig er c'harr uhel e benn ha laouen e selloù :



Gellig bras – lankad 3 : pajennoù 6-7

1. Gerioù nevez

chilpadenn : harzhadenn.

lêrenn : tamm kordenn graet e lêr da stagañ ul loen.

lenn : un ec'honad dour, ur poull-dour bras.

torgenn : tuchenn, menez bihan.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez ar memes tra ha :

diwall ouzh :

tro-c'houzoug :

3. Argenañ an araogennoù (kendalc'h)

Kement e plije dezhañ. = Plijet kalz e oa-**eñ**.

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

Kement e plije dezhañ..... = Plijet kalz e oa-**hi**.

Kement e plije d..... = Plijet kalz e oan-**me**.

Kement e plije d..... = Plijet kalz e oas-**te**.

4. Studi ar yezh : kerkent ha ma... e ...

Kerkent ha ma tigare tad Yann dor ar c'harr e lamme war an azezenn a-dreñv.

Tro ar frazenn amañ da heul gant « Kerkent ha ma... e ... » :

1. Da gentañ ez erruont war park ar c'hirri, ha diouzhtu war-lerc'h, e veze ret da Yann stagañ buan e lêrenn ouzh e golier.

Kerkent ha mae

5. Distag ar gerioù-mañ :

Retevezed a yannped'edud stagañ buan allêrennouz he golier pavezent war parkarc'hirri.

.....

.....

6. Barrenn ar frazennoù gaou :

1. Tad Yann a brenas ur c'harr nevez evit bale Gellig.
2. Laouen e oa Yann hag e dud o klevout Gellig o chilpat.
3. Ret e oa da Yann stagañ Gellig a-wechoù.
4. Aon en doa Gellig rak tud Yann hag e felle dezhañ tec'hout.
5. Klemm a rae an dud all pa lamme Gellig en o c'harr.


7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Perak e chilpe Gellig er c'harr ?
-

2. E peseurt departamant eus Breizh emañ Yann hag e dud o chom ?
-

3. Hag aet eo Gellig gant karr unan bennak all ? Eilskriv ar frazenn en lavar :
-

4. Tres amañ dindan Yann gant Gellig o sachañ a bouez e lêrenn.



Gellig bras – lankad 4 : pajennoù 8-11

1. Gerioù nevez

e-leizh a... : kalz a...

ebatal : kaout plijadur, c'hoari.

a-greiz-holl : a-daol-trumm, en un taol.

gwelout liv eus un den : kavout roud anezhañ, gwelout anezhañ.

2. Em soñj da unan :

Er frazenn-mañ : « Ha Gellig war he lerc'h. »

War-lerc'h piv pe petra emañ Gellig ?

Yann

ar geuneudenn

Displeg, penaos 'c'h eus kavet ?

3. Argenañ an araogennoù

betek **enni** = betek ar geuneudenn (benel, **hi**).

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

Betek ar paotr = betek

Betek me = betek

Betek te = betek

Betek ni = betek

Betek c'hwi = beetek

Betek ar baotred hag ar merc'hed = betek

4. Studi ar yezh :

Sell ouzh ar frazenn :

« Trist en em santent **o-zri**. »

« Trist en em santan **ma-unan**. »

« Trist en em santez _____ . »

5. Distag ar gerioù-mañ :

Hageñhagervelivez.

6. Barrenn ar frazennoù **gaou** :

1. A-greiz-holl, setu Yann o harzhal.
2. Bannañ a rae Yann boued da C'hellig da greiz al lenn.
3. Aet e oa Yann hag e dud da zebriñ koan war ribl al lenn.
4. Ne weler mui liv ebet eus Gellig.
5. Yann hag e dad a c'halv Gellig.

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Perak e stag tad Yann e lêrenn ouzh kolier Gellig ?

-
2. Ha gouzout a oar Gellig neuñval ?

-
3. Ha servijout a ra d'un dra bennak goulenn digant an dud pelec'h emañ Gellig ?
Eilskriv ar frazenn en lavar :

-
4. Perak em sante trist Yann hag e dud war ribl al lenn ?
-

Gellig bras – lankad 5 : pajennoù 12-15

1. Gerioù nevez

gant ma ... : Spi 'm eus ...

war gab e revr : war e benn adreñv.

perc'henn : mestr, an hini zo un dra dezhañ.

trugarekaat : lavarout trugarez.

en em stardañ : mont tost, peg.

eme : a lavar

2. Klask ur ger kenster :

youc'hal :

3. Argenañ an araogennoù

fiziañs **ennomp** (-ni).

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

Fiziañs (- me)

Fiziañs (- te)

Fiziañs (- eñ)

Fiziañs (- hi)

Fiziañs (- ni)

Fiziañs (- c'hwi)

Fiziañs (- i)

4. Distag ar gerioù-mañ :

Diaeseoagouzoutekalonpiveoarmuiañalevenez.

5. Barrenn ar frazennoù gaou :

1. Chomet eo Yann hag e dud war ribl al lenn.
2. Distroet eo Gellig e-unan d'ar gêr.
3. Aet e oa Gellig da gousket e ti tud all.
4. Laouen e oa an holl.
5. Jentil e oa an daou zen.

6. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Pegoulz ha perak o deus gwelet ar paotr hag e wreg e oa Gellig en o c'harr ?
-
-

2. Rak petra en deus aon tad Yann ?
-
-

3. Klask er skrid un doare all da lavarout : « Trugarez deoc'h » :
-
-

4. Perak e lavar Yann e oa jentil ar paotr hag e wreg ?
-
-

Gellig bras – lankad 6 : pajennoù 16-19

1. Gerioù nevez

sammgarr : karr evit sammañ traoù bras, karr-samm pe sammorell.

neuziet-fall : divalav da welout, tresoù drouk dezhañ.

VERB + en ur + VERB: an daou ober a vez graet war un dro.

lez : ribl, bord.

2. Klask ur dro-lavar kenster :

buan-tre :

3. Argenañ verboù

emezañ (-eñ).

Ha gouest out da gavout an or a zere amañ da-unan ?

..... (- me)

.....(- te)

..... (- eñ)

..... (- hi)

.....(- ni)

..... (- c'hwi)

.....(- i)

4. Ar rannig « en ur »

Pa gaver ar rannig **EN UR** etre daou verb e talvez e vez graet an daou ober war un dro. Skriv frazennoù ma vo graet an daou ober war un dro :

lavarout / c'hoarzhin :

.....

.....

deskiñ / lenn :

.....

.....

kanañ / bale :

.....

.....

5. Distag ar gerioù-mañ :

Ezhomm keuneud devoa hagio-zrier-maezeusarc'harrhagerc'hoad.

.....

6. Barrenn ar frazennoù gaou :

1. Kollet eo bet Gellig c'hoazh.
2. O vont da gerc'hat keuneud e oa aet Yann hag e dud.
3. Un aer drouk zo d'ar paotr en e sammgarr.
4. Kas a ra paotr e sammgarr Gellig d'e di.
5. Aon en deus Gellig.

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Pegoulz e c'hoarvezas an darvoud nevez a zo o vont da vezañ kontet amañ ?

2. Perak o deus ezhomm tud Yann keuneud ?

3. Perak e c'hoarzh paotr e sammgarr ?

4. Perak ne dec'h ket Gellig kuit pa zigor ar paotr dor e garr ar wech kentañ ?

5. Perak e tec'h Gellig kuit pa zigor ar paotr dor e garr an eil gwech ?

6. Displeg pezh a dalvez « Setu te e surentez bremañ ».

Gellig bras – lankad 7 : pajennoù 21-23

1. Gerioù nevez

bezañ KROG da... : kregiñ da..., ar penn-kentañ un ober eo...

kaout riv : bezañ yen d'an unan, kaout anoued.

daoust dezhañ : un enebadur zo amañ, koulskoude...

aleno : eus al lec'h-hont : *pell aleno* = pell eus al lec'h-hont.

hogen : met.

ar beure : ar mintin.

2. Klask un dro-lavar :

« Kaout sec'hed **ruz** » a dalvez « kaout sec'hed BRAS ».

Ha gouzout a rez peseurt liv eo an « naon BRAS » ? Kroaz ar garrezenn a zere.

Naon glas zo deuet din. Naon du zo deuet din. Naon ruz zo deuet din.

3. Argenañ araogennoù

dezhañ (-eñ).

Ha gouest out da argenañ an araogenn « da » en holl c'hourioù ?

..... (- me)

..... (- te)

..... (- eñ)

..... (- hi)

..... (- ni)

..... (- c'hwi)

..... (- i)

4. « na »

Ar ger nac'h « **NA** » a dalvez da stagañ daou anv pe div lavarenn ur frazenn nac'h (NAG dirak ur vogalenn) :

« Ne roas netra da zebriñ **na** da evañ d'ar paour-kaezh Gellig. »
« Tremen a reas an noz hep debriñ **nag** evañ. »

Hag ivez : « Ne gomzont **na** ne c'hoarzhont. »

Ijin-te ur frazenn gant « **NA** » :

.....
.....

MET « **NA** » pe « **NAG** » dirak un adanv a dalvez da greñvaat an adanv-se, evel « **pegen** » :

« O ! **NAG** hir e voe kavet an noz gant ar c'hi bihan ! » = « **PEGEN** hir e voe kavet an noz gant ar c'hi-bihan ! »

Ijin-te ur frazenn gant « **NA** » da greñvaat un adanv :

.....
.....
.....

5. Distag ar gerioù-mañ :

Mont a reas an den kuit gantesamm garrolez el gellig staget mat ouz hargordenn.

.....

6. Kroaz ar frazennoù gwir :

1. Kroget en deus Gellig en den drouk.
2. Re a hunvreoù a ra Gellig evit gallout kousket.
3. Treiñ ha distreiñ a rae Yann war e wele en ur glask e gi bihan.
4. Trist-kenan e oa Yann hag e dud peogwir o doa kollet kalz amzer.
5. Ar beure war-lerc'h e ro an den boued da C'hellig.

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Perak en deus Gellig riv er-maez ?

2. Perak ne ro ket ar paotr mann da zebriñ d'ar c'hi?

3. Perak ne zeu ket Gellig a-benn da gousket ?

4. E petra e soñj Gellig a-hed an noz ?

5. Petra a blij da vamm Yann soñjal ?

6. Ha hegaratoc'h eo deuet ar paotr da vezañ an deiz war-lerc'h ?

Displeg perak.

Gellig bras – lankad 8 : pajennoù 24-28

1. Gerioù nevez

tremen e-biou : tremen dre gichen, tremen war lez...

skampañ : redek kuit, tec'hout kuit gant an aon.

ur wazh : ur redenn zour vihan.

An noz o serriñ. : Emañ o noziñ, aet eo an Heol da guzh.

tizhout : mont betek.

astennet : gourvezet, ahedet.

war deñvalaat : dont a ra teñvaloc'h-teñvalañ.

kloued (ar gloued) : ur gael gant barrennoù koad pe vetal a stank ouzh an tremen.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez ar memes tra ha :

Sevel a ra an deiz :

e-pad an noz :

mont gorrek :

3. Argenañ an araogennoù

« An noz a oa o serriñ warnañ (war C'hellig). » Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

An noz a oa o serriñ war_____(-me). An noz a oa o serriñ war_____(-ni).

An noz a oa o serriñ war_____(-te). An noz a oa o serriñ war_____(-c'hwi).

An noz a oa o serriñ war_____(-eñ). An noz a oa o serriñ war_____(-i).

An noz a oa o serriñ war_____(-hi).

4. Studi ar yezh : klask, war ar bajenn 26, daou dra a ra Gellig war un dro.
Gant peseurt gerioù int staget ?

5. Distag ar gerioù-mañ :

Annoza oa o serriñ warnañ haskuizheoa.

6. Kroaz ar frazennoù gwir:

1. Klevout a reas an daou baotr ul lennadenn.
2. Anavezet e oa an den drouk gant an daou baotr.
3. Pa voe distaget ar c'hi e lipas o dorn d'o zrugarekaat.
4. N'o deus ket bet amzer an daou baotr da flourañ Gellig.
5. Redet en deus Gellig e-pad an devezh.
6. Chom a ra Gellig da gousket er-maez un nozvezh all.

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Perak e fell d'an daou baotr distagañ ur c'hi n'anavezont ket (p. 24) ?

2. Perak n'o deus ket an daou baotr flouret Gellig ?

3. Pelec'h e kavas Gellig dour da evañ (p. 26)?

4. Peseurt gwallzarvoud a c'hoarvez er bajenn 27 ?

Gellig bras – lankad 9 : pajennoù 30-35

1. Gerioù nevez

tener : flour, kuñv, dous...

gant evezh : o tiwall.

mezeg-loened : medisin evit al loened.

e ken kaz ma... : en ur soñjal e c'hoarvezfe...

ar pare : an dibenn eus ur c'hleñved.

oberata : seveniñ un ober surjianerezh war korf ur c'hlañvour evit e bareañ.

ul louzoù : ur remed a dalvez da bareañ ur c'hleñved.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez ar memes tra ha :

komz :

nec'het, ankeniet :

3. Argenañ an araogennoù

« Met banne ebet n'en devoe **digantañ** kennebeut (**digant** an den-se). »

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

Banne ebet _____(-me). Banne ebet _____(-ni).

Banne ebet _____(-te). Banne ebet _____(-c'hwi).

Banne ebet _____(-eñ). Banne ebet _____(-i).

Banne ebet _____(-hi).

4. Lenn an niverenn bellgomz (p. 34) e vouezh uhel.

5. Studi ar yezh : klask, war ar bajenn 31, daou dra a ra ar paotr yaouank war un dro. Gant peseurt gerioù int staget ?

6. Distag ar gerioù-mañ :

Gellezivskouarngelledreidgellbegelosthaguntarchgellindandanc'houzoug.

7. Kroaz ar frazennoù gwir:

1. Kas a ra ar paotr youank Gellig da di tud Yann. ○
2. N'en deus ket Gellig naon. ○
3. Arabat reiñ dour da C'hellig peogwir e c'hallo staotañ e pep lec'h. ○
4. D'ar mezeg-loened e kas ar paotr Gellig. ○
5. Embann a ra tud ar paotr er gazetenn o deus kavet Gellig. ○
6. Tud zo o c'hortoz e ti ar mezeg-loened. ○

8. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Perak n'en deus ket naon Gellig (p. 31) ?

2. Perak eo arabat reiñ mann ebet da evañ na da zebriñ da C'hellig (p. 32) ?

3. Petra a ra an dud evit embann ur gemenadenn er gazetenn (p. 34) ?

4. Na te, petra a raves mar kavfes ur c'hi gloazet ? Perak ?

Gellig bras – lankad 10 : pajennoù 36-39

1. Gerioù nevez

tastornat : stekiñ gant e zorn evit santout hag anavezout.

gar : ezel traoñ ul loen. Divhar o deus an dud. Peder gar o deus ar chas.

plastrañ : lakaat ur plastr.

emichañs : sur a-walc'h.

kerkent : diouzhtu.

flotantenn : pezh dilhad evit labourat heñvel ouzh ur chupenn a ziskenn izel.

reut : na bleg ket, ne c'hell ket plegañ e-unan.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez ar memes tra ha :

kousket mat :

tener :

3. Argenañ an araogennoù

« Komz a reas ar mezeg-loened en un doare hegarat **outañ** (ouzh Gellig). »

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

Komz hegarat(-me). Komz hegarat(-ni).

Komz hegarat(-te). Komz hegarat(-c'hwi).

Komz hegarat(-eñ). Komz hegarat(-i).

Komz hegarat(-hi).

4. **Kemmadurioù** : goude ar gerioù bihan « e », « da », « o », « pa » e kemm lizherenn gentañ ar gerioù zo d'o heul.

Evel « Un dra a blije kenañ da **C'hellig**. » Emañ ar frazenn o komz eus **Gellig**. Klask petra eo lizherenn gentañ ar verboù amañ da heul pa ne vez ket ar gerioù bihan dirazo :

e **c'har** : pa **gomzas** :

pa **zihunas** : da **zebriñ** :

o **tihuniñ** : da **gousket** :

5. **Distag ar gerioù-mañ :**

Gelligasantasurbikadennvihanhepkena-raokmenelkousketkloz.

.....
.....

6. **Kroaz ar frazennoù gwir :**

1. Torret en deus ar mezeg-loened gar Gellig. ○
2. Ar paotr yaouank ne gred ket pezh a lavar ar mezeg-loened. ○
3. Mat eo na reiñ na da zebriñ na da evañ da unan a vo oberataet. ○
4. Louzoù-kousket a roas ar mezeg-loened da C'hellig. ○
5. Reiñ a ra ar mezeg-loened un askorn da C'hellig da c'hoari. ○
6. Pa zihunas Gellig e oa astennet en ur c'harr. ○

7. **Goulennoù diwar ar skrid.**

1. Pegeit amzer e chomo ar plastr war c'har Gellig (p.36)?

.....

2. Piv eo den e flotantenn wenn (p. 38) ?

.....

3. Penaos e ro ar mezeg-loened al louzoù-kousket da C'hellig (p.37)?

.....

4. Perak e ro an den yaouank boued da zebriñ ha dour da evañ da C'hellig (p. 39)?

.....

Gellig bras – lankad 11 : pajennoù 40-44

1. Gerioù nevez

lein : pred ar beure.

darvoud : un dra a c'hoarvez.

reiñ bod : reiñ degemer.

klok : penn da benn.

kerc'hat : tapout, kemer.

ne da mui : ne ya mui.

2. Klask ur ger er skrid a dalvez da envel :

al lec'h ma vez renket ar c'harr :

sellout mat, sellout a dost :

3. Argenañ an araogennoù

An araogenn « war » : « Ur vedalenn skrivet **warni** e anv. »

Ha gouest out da gavout an araogenn a zere amañ da-unan ?

.....(-me).

.....(-ni).

.....(-te).

.....(-c'hwi).

.....(-eñ).

.....(-i).

.....(-hi).

4. Kemmadurioù : goude ar gerioù bihan « e », « da », « o », « war », « en ur » e kemm lizherenn gentañ ar gerioù zo d'o heul.

Evel « Un dra a blij e kenañ da **C'hellig**. » Emañ ar frazenn o komz eus **Gellig**.

Klask petra eo lizherenn gentañ ar verboù amañ da heul pa ne vez ket ar gerioù bihan dirazo :

e **gasetenn** :

o **welet** :

en ur **vont** :

da **di** :

o-**zri** :

war **deir gar** :

5. Distag ar gerioù-mañ :

Morseneoabetgwelettadoredekkenbuanbetekarpellgomzerhagokomzkenbuan.

.....

.....

6. Kroaz ar frazennoù gwir :

- 1. Goude lein e lenn Yann ar gazetenn. ○
- 2. Trugarekaat a ra Tad Yann hag e vamm. ○
- 3. C'hoarzhin a rae an holl dud o welout Gellig o redek war deir gar. ○
- 4. Bremañ eo pare gar Gellig. ○

7. Goulennoù diwar ar skrid.

1. Perak ne gouske ket mat Yann er gêr (p.40)?

.....

.....

2. Da belec'h ez a Yann hag e dud gant ar c'harr (p. 41) ?

.....

.....

3. Perak e c'hoarzh an holl o welout Gellig o redek war deir gar. Daoust ha c'hoarzhin goap a reont (p.41)?

.....

.....

4. Pegeit amzer eo bet gar Gellig gant ar plastr (p. 43)?

.....

.....

5. Petra en deus komprenet mat Gellig e dibenn an istor (p. 44) ?

.....

.....